

Liskildry (Gab)

Gabriel Marie Le Febvfre (Goudelein 1863 – 1927)

Taolenn

E-tal ar waz

O pesketa

E-tal ar waz

‘Korn ma frad eur feunteunig
Hag e-biou dezi eur wazig,
Eur wazig dour digemmesk
Nan e’ eet kammed da hesk.

Goude lein, me d’evesaad
Mar ‘mañ ‘n haleg o hlasaad ;
Pa deu d’an haleg bleunio’
‘Zav ar goañv da vond en-dro.

‘Tal ar wa kannerezed,
(Ken sard ne oufeh gweled) ;
Troñset gante o mañchou,
Serret klok ‘n o hasedou.

Herruz-herr¹ ‘ya ar holvaz,
Herrusoh an teodou c’hoaz ;
‘Leh ‘zo² diou blah ‘vez marhad,
‘Leh ‘zo teir ‘vez foar...dalmad !!

« Fañchonig, ar plah faro,
‘Benn goueliou Pask a zougo,
(‘Vid he zad, o ! pebez neh !)
Heh enor war he divreh. »

« Yann e Gerniou, a Vod-Ska,
Eo gratis d’e ziskoa’³,
‘Baoe eet kuit e wreg Kato,
Da skañbennañ der ar vro. »

« Lip ‘zo manet, war ‘glevan,
E zorn mad morzet outañ !
Deski d’e zorn kleiz ‘ranko
Hent ar werenn d’e heno’. »

« Lom Skraper ‘blijje dezañ
Samma melchon an nesañ :
Diwezañ gwech ‘rey en-dro
Gand eur chaokad bahado’ ! »

« Per FRiter ‘vanas ‘n e lerh.
Nebeutoh a dra d’e verh :
‘Leiz an oaled a huzel⁴
Ha logod treud er hrignel⁵ ! »

¹ Herruz-herr : buan-tre.

² ‘zo : tregerieg : ez eus.

³ Eo gratis d’e ziskoa’ : gwelloc’h eo evitañ.

⁴ huzel = huzil.

« Katekig 'oa he mennoz
Moned d'an ebatou noz ;
Kouezet 'deus 'n eur poull hawe
Hag hi yen sklaset abaoe. »

Pa deuas din eur haouad paz...
Ar hannerezed 'davas !
Anez 'benn 'vije noz,
'Dije peillet ar barroz.

⁵ er hrignel : er hrignol.

O pesketa

War don Kêr-Iz.

Avel kuz-heol deuz ar beure,
Broutah on-devo c'hoaz hirie :
En ti, er-mêz, gwasañ tommder !
Da besketa, gwellañ amzer !

« -Yann, prim er prad da vuzuka⁶ !
Fañch, el lanneg da hwileta⁷ !
Hag, er hreiz-se, me a reizo
Glastrenn⁸, linenn hag higenno' . »

Gand difre paket ma zamm lein,
Ma zah pesketa war ma hein,
Me da redeg 'trezeg ar ster
'Vel 'h a d'an ebat an dañser.

Nag e lamm en dour ar pesked !
Kaerrañ fritadenn 'raog nebeud⁹ !
Flip ! flip ! beh 'zo war ar c'hwiled,
Mez foei warne ! n'int 'med darzed !

Du-hont, dindan eur bouchad gwern,
E tle bezañ dluzed dre vern ;
Deom goustadig a-gammed flour,
Anez... eet on hoan gand an dour.

Flip ! flip 'dare ! Paket unan !
Dreist penn 'm-eus hañ stlapet el lann !
Gwall-fourgas 'ra du-hont, e kreh,
War an amann e vezo beh.

Pa vezin distro war ma hiz,
'Vo laret c'hoaz 'vel 'mañ ar hiz :
« Gand seurt amzer da besketa !
Me 'ouie n'ho-pije netra ! »

Me a droho... —« 'Leiz ho keno'
E laoskit gevier divalo ;
Biskoaz den diotoh, Naig...
Stouvit ho peg, ha d'ar billig ! »

Mez, ar pesk du-hont a vo poah¹⁰ ;

⁶ da vuzuka : da dapoud buzug.

⁷ da hwileta : da dapoud c'hwiled-dero.

⁸ Glastrenn : gwalenn-besketa.

⁹ nebeud "nebed" er skrid orin evid ar rim.

¹⁰ poah : poaz.

Hastom hen lakaad en on zah !...
'Tro Doue !... an darvoud flemmuz !...
Da hlesker setu eet ma dluz !

Eur hi a dapfe eun taol troad,
E-leh an askorn da lipad,
N'afe d'e loch gand mui a herr,
'Vid nan on distroet d'ar gêr.

'Vel eur penn mouzet 'hed an hent,
O krozmolad etre ma dent :
-« Perag er ster emañ 'kevred
An dluzed hag ar gleskered ? »

Mez, 'vel 'mañ 'n amzer, hen kemer,
'Zo ar gwella tra da ober ;
Ba ! en dro-mañ... evel bepred
'M-eus gwelet c'hoaz kalz a besked !!